



Tren an dilhad

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv ?

Adalek ar Rv en ur sal vras pe er maez

Talvoudegezh ar c'hoari

Adwelout anvioù al livioù hag an dilhad
Bezañ aketus

Mont en-dro ar c'hoari :

Ar vugale a zo azezet en ur c'horn deus ar sal. Mestr ar c'hoari a ginnigo, d'ar re o deus, da skouer botoù du, mont d'e heul e-barzh an tren.

Ur wech staget an eil ouzh egile e ra an tren un droiadig hag en em gav en-dro dirak ar re azezet.

Mestr ar c'hoari « erruet omp e Brest, an holl re o deus ur bragoù glas a ya gant an tren ». Hag an tren kuit en-dro.

Pa en em gavo ur wech all e c'hello lâret : « Erruet omp en ti-gar, an holl re o deus loeroù gwenn a ziskenn »

Hag all ...

Goude un nebeut troioù, ur wech komprenet ganto, e tiskeno deus an tren oc'h heuliañ ar memes reolenn. Ur marc'h du all a vo neuze.

A-bouez eo lakaat ar marc'h du da zoujañ ivez ouzh ar reolenn : bezañ marc'h-du a zo unan deus an traoù a blij ar muiañ d'ar vugale